

Gerioù ar vuhez

RKB

▶▶ Radio Kreiz Breizh

LUDU

Ludu

Anv boutin, un orin keltiek dezhañ,
a vez adkavet e kembraeg, lludw
hag e kerneveureg, lusu


Al ludu (anv-stroll)

Luduoù (liester ral-tre)

Luduañ, devañ penn da benn



http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudennou_krouet_gant_Malo_Ar_Menn



Arouez ar veilhadez,
ar vuhez da noz...

Luduenn,

un den a chom e-kichen
an tan da noz

Gant un eil ster, un den
treuzek « treuhek », **teuk**

Luduenniñ, chom da
straniñ ba'r gêr, da noz


Fañch al Ludu,
an den a gonte
marvailhoù
e-barzh an oaled

Ur pod-ludu

Er jardin...

Al ludu veze implijet kalz ba'r jardin d'ober temz
(ar ger ludu e unan a dalv temz alies)

Moaien zo lakaat ludu ivez evit harzañ ar melc'hwed
dont da zebriñ legumaj er jardin




Ul laer-avalou, un
avalaouer, un huruson

Arouez buhez an den,
warlerc'h ne vimp nemet ludu...

Merc'her ar Ludu, deiz kentañ ar C'hoareiz
Koraiz, Koareiz, ar mare a-raok Pask e-lec'h ne vez
ket debret kalz

Meurzh al Lard, an deiz kentañ a-raok ar C'hoareiz

Gwechall e vije graet koursoù kezek deiz Merc'her
al ludu ba Kallag



Herri a lâr...

Gwechall e veze implijet al
ludu da gannañ an dilhad.

Lakaet e veze ludu da
drempañ b'an dour e-pad un
tamm krogad. Tennet e veze
al ludu ha miret an dour evit
naetaat an dilhad...



COFINANCÉ PAR
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne / Avec le Fonds européens
de développement régional